

TREMEN 'RA PEP TRA

Tout passe

Funérailles / Défunts



♩=80

Se-laou, va breur ker Bu - an 'red an am - zer Tre-men 'ra pep



tra Nerzh, ma-doù, ye - c'hed Ya - ouan-kiz ha ge - ned



Tre-men 'ra pep tra Tre - men 'ra pep tra

1
Selaou, va breur ker
Buan 'red an amzer
Tremen 'ra pep tra
Nerzh, madoù, yec'hed
Yaouankiz ha gened
Tremen 'ra pep tra
Tremen 'ra pep tra

2
Skeudenn da vuhez
Eo al lestr a welez
Tremen 'ra pep tra
He roudoù er mor
Zo kloz a-vec'h digor
Tremen 'ra pep tra
Tremen 'ra pep tra

3
Tud skañv ha distur
A glask ar blijadur...
Tremen 'ra pep tra
Fenoz o fringal
Warc'hoazh er bez teñval...
Tremen 'ra pep tra
Tremen 'ra pep tra

4
Kant vloaz ha mil bloaz
A ve disterig c'hoazh...
Tremen 'ra pep tra
Nemet c'hwi, Doue,
Hag an eternite
An eternite
An eternite !

1
Ecoute, mon cher frère,
le temps court vite,
toute chose passe.
Force, biens, santé,
jeunesse et beauté,
toute chose passe !
toute chose passe !

2
L'image de ta vie,
c'est le vaisseau que tu vois :
toute chose passe !
ses traces dans la mer
se ferment à peine ouvertes
toute chose passe !
toute chose passe !

3
Les gens légers et sans repère
recherchent le plaisir.
toute chose passe !
ce soir à gambader,
demain dans le sombre tombeau...
toute chose passe !
toute chose passe !

4
Cent ans et mille ans,
c'est encore peu de chose.
toute chose passe !
Mais il y a vous, Dieu,
et l'éternité !
l'éternité !
l'éternité !